

Marvet eo Andreo Merser

Unan euz ar re o-deus bet labouret ha poaniet ar muia evid ar brezoneg en il hanterenn an XX^{ved} kantved a zo o paouez mond da anaon : Andreo Merser (André Le Mercier). Marvet eo dilun, d'an 31 a viz kerzu, e Brest, d'an oad a 95 vloaz. Ganet e oa bet e Sant-Kê-Porzolued (Aojour-an-Arvor) hag e lise Brest e-noa bet greet e studiou. Eur wech êet da skolaer e 1944, e oa bet anvet e meur a skol, beteg en Aljeri.

E skol bublik Groñvel, e kreiz Breiz, e oa en em gavet goude ze. Bet eo bet unan euz ar re genta toud e-touez ar skolaerien hag e-noa klasket tenna gonid deuz al lezenn Deixonne ha kelenn brezoneg d'e skolidi : d'ar houlz-ze, eno, e oa c'hoaz kalz hag a ouie anezañ. Bet eo bet adaleg neuze unan euz ar re hag a heulie an doare Freinet d'ober skol. Dre ze e-noa bountet war vugale ar skol d'embann eur gazetenn brezoneg ha galleg ha da c'hoari pezh e brezoneg : soñj mad a zo bet dalhet du-hont. E Brest e oa bet anvet er fin, ha kuzulier pedagogel war ar brezoneg e oa bet neuze en Akademiezh Roazon.

Perz e-neus bet kemeret ive Andreo Merser e meur a strollad da gas ar yez war a-raog. E-touez ar re genta ema bet gand Armand Keravel oh adsevel Ar Falz war-lerh ar brezel diweza. Diwezatoh e-neus savet eur gevredigez Ar skol vrezoneg, da rei kenteliou dre lizer, ha kenteliou-noz e Brest. A-raog na vefe bet euz Diwan, e-noa digoret Skol ar merher e Brest er bloaveziou 1970, da gelenn brezoneg da vugale ar henta derez na pa ve med eun devez ar zizun.

E penn Emgleo Breiz ema bet e-tro-pad eur pemzeg vloaz bennag, etre 1987 ha 2002. Er mareou-ze eo bet, a volontezevad, unan euz an embannerien kenta, pa deue a-benn d'embann eul leor brezoneg pe daou ar miz : eun ti-moulla e-noa savet ezhprez-kaer evid se d'an ampoent. D'ar houlz-ze eo bet ive rener ar gelaouenn Brud Nevez, anavezet evel unan euz ar re wella en or yez.

Andreo Merser a oa tomm e galon ouz ar skol bublik hag ouz ar skol laïk. Deuz e wella e-neus bet greet evid ma vefe kelennet ar yez d'ar muia pousubl a vugale hag a dud. Skrivet e-neus hag embannet evid se meur a leor : eur hramadeg, leoriou kananouennou, ha dreist-oll "Ar geriadur", eur pezh geriadur brezoneg galleg ha galleg brezoneg. Da geñver 200 vloaz an Dispah, e 1989, e-noa kavet an tu da zastum e daou leor ar skridou brezoneg a oa bet moulllet e mod pe vod er bloaveziou-hont.

Da gimiadi diouz Andreo Merser, en em gavo e vignoned digwener, 4 a viz genver, da 10 eur hanter, e funerarium ar Wern e Brest.